

Sekañs an arz hag an diskar-amzer

Re vras

Pal pennañ : Sevel un oberenn war an diskar-amzer

Palioù all : adwelet al livioù, ar c'houlzioù-amzer, komz, diskrivañ, implij teknikoù evit sevel un oberenn

Abadenn 1 – al livioù hag ar c'houlzioù amzer – Meurzh 22.11.2016 –
Gervel 3 bugel e touez ar re vras hervez ar pezh emaint oc'h ober evel stal er c'hlas

1 – Al livioù, 5mn

→ kemer al livioù unan hag unan ha goulenn gant ar vugale *lavar penaos int anvet*

→ goulenn ma e *anavezont ar gerioù «livioù tomm» ha «livioù yen»*

Displegañ en ur skeudennaouiñ

→ livioù tomm = livioù flammen an tan

→ livioù yen = livioù ar skorn, an noz, an deñvalijenn

Displegañ e c'hell un liv bezañ tomm ha yen : al liv gwer e-barzh boest al livioù zo kentoc'h tomm, liv gwer ar plant bras e-kreiz ar c'hlas a zo kentoc'h yen.

→ renkañ boest al livioù

2 – Ar c'houlzioù amzer, 10-15mn

→ Kemer ar 4 skeudenn a diskouezont ar c'houlzioù amzer

→ Goulenn gant ar vugale *reiñ anvioù ar c'houlzioù amzer* ma ouezont, reiñ an anvioù dezho m'ho deus disoñjet.

→ Goulenn gant ar vugale *dielfennañ, displegañ petra a c'hoarvez war pep skeudenn*

Goulenn gante *gerioù ar gwez hag an natur* en ur diskouez gant ar biz un dra war ar skeudenn en ur goulenn «*Petra eo*».

Ar gerioù : *ar c'helf, an delioù, ar geot, ar brankoù, ur valafenn*

→ Reiñ an tikedennoù dezho unan hag unan, goulenn gante petra zo war ar skeudenn hag e peseurt koulz-amzer e vo renket. Dav eo d'ar vugale lavar anv ar c'houlz-amzer a soñj dezhañ eo an hini mat. Ma vez fazioù, goulenn gant an 2 bugel all pelec'h ho defe renket ha perak.

→ Ober ar frazenn skouer : «*Plijout a ra din an nevez-amzer peogwir ez eus bleunioù*» ha goulenn gant pep bugel ober unan war memes patrom

→ Renkañ ar stal labour war ar c'houlzioù-amzer

Kemer an tri all hag a zo e-touez ar re vras evit ober ar memes poelladenn

Abadenn 1

Prientiñ :

- Un daol
- 4 gador

Dafar :

- Boest al livioù
- pakad tikennoù ar c'houlzioù amzer

Tachenn labour ar programmoù :

- 2a – Ezteurel gant komzoù ent-kereadurel reizh ha resis.
- 28 – Kinnig diskoulmoù d'ar raktresoù
- 43 – Lec'hiañ darvoudoù bevet an eil e keñver egile hag o lec'hiañ anezho : ur c'houlz-bloaz.
- 46 – Lec'hiañ objedoù en e geñver, etrezo, e-keñver objedoù merk

Skipailhoù 3

Gervel 3 skoliad e touez ar re vras hervez ar pezh emaint oc’h ober evel stal er c’hlas

1 – Diskrivañ ar fotoioù, 5mn

→ Goulenn gant ar skolidi «*petra a weler war ar skeudenoù ?*»

«An diskar-amzer eo», «Delioù a zo o kouezhañ war an douar»

«Orañjez ha melen int an delioù»

Evit heñchañ ar respontoù e c’heller goulenn : «*peseurt koulz-amzer eo*»,

«*pelec’h eo bet kemeret ar skeudenoù*», «*Peseurt liv zo gant an delioù ?*»

«*Petra eo an dra-se ?*» (en ur diskouez ar c’helf da skouer)

2 – Diskrivañ un oberenn, 10-15mn

→ Lezel un nebeut segondennoù d’ar skolidi evit sellet ouzh an oberenn

→ Goulenn gant ar skolidi «*Daoust hag eñ ez eo ur foto, ur poltred ?*»

«*Petra eo neuze ?*»

→ Goulenn gant ar skolidi «*petra a weler war an oberenn ?*»

«An diskar amzer eo», «Gwez a zo», «Ur ster a zo»

«Un den a zo o pesketañ»

Evit heñchañ ar respontoù e c’heller goulenn : «*peseurt koulz-amzer eo*»,

«*pelec’h eo bet kemeret ar skeudenoù*», «*Peseurt livioù zo war an*

oberenn ?» «*Petra emañ an den oc’h ober ?*»

→ Goulenn gant ar skolidi «*perak ez eus skeudenn ur plac’h e-kichen an*

oberenn ?» «*Piv eo ?*» «*Petra zo skrivet dindan ar skeudenn ?*»

→ Goulenn gant ar skolidi daoust hag eñ e blij dezho ha petra a blij dezho pe a zisplij dezho ?

Kemer an tri all hag a zo e-touez ar re vras evit ober ar memes poelladenn

Abadenn 3 – Sevel un oberenn – Lun 28.11.2016 – Pazenn 1

1 – Diskouez ar pezh a vo graet, displegañ – 5mn

Penn-kentañ an devezh :

→ bodañ an holl skolidi hag a zo e touez ar re vras evit diskouez dezho un oberenn hag a vo da ober.

→ Displegan dezho penaos e vo graet

→ Displegañ dezho e vo graet traoù e pad 2, pal an devezh a vo ober an delioù, troc’hañ ha livañ anezhe pep hini a c’hello mont d’ober un nebeut delioù pa en d’o c’hoant, met ret e vo da bep hini bezañ graet 2 delienn pep hini a-raok fin an devezh.

→ Displegañ dezho ez eus un daol ispisial evit mont da dresañ an delioù

→ Displegañ dezho e c’hellont dont da goulenn sikour din

2 – Kregiñ an oberenn

→ En un doare emren o deus da labourat gant an dafar hag ar skouerioù prientet

Abadenn 2

Prientiñ :

Un daol

4 gador

Dafar :

fotoioù an diskar-amzer

taolenn V. Abbaticci

Tachenn labour ar programmoù :

2a – Ezteurel gant komzoù ent-kereadurel reizh ha resis.

3 – Pleustriñ doareoù disheñvel d’ober gant ar yezh dre gomz : kontañ, deskrivañ, dec’hervel, displegañ, goulennata, kinnig diskoulmoù, eskemm ur savboent.

27 – Deskrivañ ur skeudenn

Abadenn 3

Prientiñ :

(penn kentañ an devez)

Bodañ ar re vras – Elipsenn

Ur foto eus ar pezh a vo kinniget

Un daol gant an dafar e c’hellont implij

Dafar :

Kreionoù koad liv

follennoù

toullerezh

Skouerioù delioù

Tachenn labour ar programmoù :

2a – Ezteurel gant komzoù ent-kereadurel reizh ha resis.

20 – Dibab ostilhoù disheñvel, mediaoù, skorioù hervez ur raktres pe un urzh-labour. Implij anezho o azasaat e jestr.

21 – Tresañ evit skeudennaouiñ o chom feal ouzh ar werc’helezh pe ouzh ur patrom, pe en ur ijinañ.

23 – Kas da benn oberennoù plastek, e-unan

27 – Deskrivañ ur skeudenn

28 – Kinnig diskoulmoù d’ar raktresoù

+ graferezh

1 – Diskouez ar pezh a zo bet graet ha kontañ an delioù graet, choaz pet a vo graet ouzhpenn. – 5mn

→ Displegañ e vo ret dezho kenderc'hel e-pad ar mintinvezh d'ober an delioù evit stagañ anezhe goude kreisteiz

2 – Kenderc'hel an oberenn

→ Kenderc'hel d'ober delioù en un doare emren

3 – Stagañ an delioù ouzh ar brankoù – 15mn

→ Staliañ asambles an delioù ouzh ar brankoù

→ Staliañ ar brankoù er c'hlas, pelec'h ?

Kas brankoù
Ha
Fiselenn !!

Abadenn 4

Prientiñ :

(penn kentañ an devez)

- Bodañ ar re vras – Elipsenn
- Ur foto eus ar pezh a vo kinniget
- Un daol gant an dafar e c'hellont implij

Dafar :

- Kreionoù koad liv
- follennoù
- toullerezh
- Skouerioù delioù

Tachenn labour ar programmoù :

2a – Ezteurel gant komzoù ent-kereadurel reizh ha resis.

20 – Dibab ostilhoù disheñvel, mediaoù, skorioù hervez ur raktres pe un urzh-labour. Implij anezho o azasaat e jestr.

21 – Tresañ evit skeudennaouiñ o chom feal ouzh ar werc'helezh pe ouzh ur patrom, pe en ur ijinañ.

23 – Kas da benn oberennoù plastek, e-unan

27 – Deskrivañ ur skeudenn

28 – Kinnig diskoulmoù d'ar raktresoù

+ graferez

Re grenn

Pal pennañ : Sevel un oberenn war an diskar-amzer

Palioù all : adwelet al livioù, ar c'houlzioù-amzer, komz, diskrivañ, implij teknikoù evit sevel un oberenn

Abadenn 1 – al livioù – Meurzh 22.11.2016 – pep hini d'e dro

Al livioù – 10mn

Kinnig d'ar skolidi, unan hag unan dont da labourat ganin war stal al livioù

→ Goulenn gant ar skoliad tapout al livioù unan hag unan e-barzh ar boest ha lakaat anezhi war an daol en ur lavar peseurt liv eo.

Pa ne oar ket peseurt anv a zo gant al liv-mañ-liv, henchañ anezhañ en ur lavar ar silabenn pe al lizherenn gentañ ha ma ne gav ket, reiñ anv al liv ha goulenn gentañ adlavar.

→ Evit ar re a vank dezho kalzik a anvioù liv, bep tro ma vo ouzhpennet ul liv e vo lavaret anvioù an holl livioù bet lakaet war an daol er memes urzh bep tro.

Bep tri liv ouzhpennet e vo goulennet gentañ en dizurzh «*Diskouez din al liv ...* » pa vo gouest ar bugel da lakat e biz war pep liv goulennet e vo tu goulenn gentañ «*Peseurt liv eo ?* » en ur diskouez dezhañ ul liv.

→ Evit ar skolidi a ouiont anvioù al holl livioù pe dost e vo goulennet gante «*Peseurt liv eo ?* » en ur diskouez dezho ul liv. Ar pal a vo mont buanoc'h buanañ evit lakaat ar skolidi da respont prim.

→ renkañ boest al livioù

Abadenn 2 – ar c'houlzioù amzer – Yaou 24.11.2016 – strolladoù 2

Ar c'houlzioù amzer – 10-15mn

Gervel 2 skoliad e-touez ar re grenn hervez ar stal emaint oc'h ober

→ Kemer ar 4 skeudenn a diskouezont ar c'houlzioù amzer

→ Goulenn gant ar skolidi *reiñ anvioù ar c'houlzioù amzer* ma ouezont, reiñ an anvioù dezho m'ho deus disoñjet.

→ Goulenn gant ar skolidi *dielfennañ, displegañ petra a c'hoarvez war pep skeudenn*

Goulenn gante gerioù ar gwez hag an natur en ur diskouez gant ar biz un dra war ar skeudenn en ur goulenn «Petra eo».

Ar gerioù : *ar c'helf, an delioù, ar geot, ar brankoù, ur valafenn*

→ Reiñ an tikedennoù dezho unan hag unan, goulenn gante *petra zo war ar skeudenn hag e peseurt koulz-amzer e vo renket*. Dav eo d'ar vugale lavar anv ar c'houlz-amzer a soñj dezhañ eo an hini mat. Ma vez fazioù, *goulenn gant ar skoliad all pelec'h en defe renket*, ma ne vez ket kavet, heñchañ en ur displegañ.

→ Renkañ ar stal labour war ar c'houlzioù-amzer

Kemer an 2 skoliad all hag a zo e-touez ar re grenn evit ober ar memes poelladenn

Abadenn 1

Prientiñ :

- Un daol
- 2 gador

Dafar :

- boest al livioù

Tachenn labour ar programmoù :

Arzoù : anavezout anv al livioù

E-kerzh an abadenn :

(Notenniñ war follenn ar skolaer peseurt liv a zo anavezet pe peseurt liv n'eo ket)

Abadenn 2

Prientiñ :

- Un daol
- 3 gador

Dafar :

- pakad tikedennoù ar c'houlzioù amzer

Tachenn labour ar programmoù :

- 2a – Ezteurel gant komzoù ent-kereadurel reizh ha resis.
- 3 – Pleustriñ doareoù disheñvel d'ober gant ar yezh dre gomz : kontañ, deskrivañ, dec'hervel, displegañ, goulennata, kinnig diskoulmoù, eskemm ur savboent.
- 27 – Deskrivañ ur skeudenn
- 43 – Lec'hiañ darvoudoù bevet an eil e keñver egile hag o lec'hiañ anezho : ur c'houlz-bloaz.
- 46 – Lec'hiañ objedoù en e geñver, etrezo, e-keñver objedoù merk

Abadenn 3 – Dielfennañ skeudennoù , gwelet un oberenn – Yaou
24.11.2016 – strolladoù 2

Gervel 2 skoliad e-touez ar re grenn hervez ar stal emaint oc’h ober

1 – Diskrivañ ar fotoioù – 5-10mn

→ Goulenn gant ar skolidi «*petra a weler war ar skeudennoù ?*»

«An diskar-amzer eo», «Delioù a zo o kouezhañ war an douar» «Orañjez ha melen int an delioù»

Evit heñchañ ar respontoù e c’heller goulenn : «*peseurt koulz-amzer eo*», «*pelec’h eo bet kemeret ar skeudennoù*», «*Peseurt liv zo gant an delioù ?*» «*Petra eo an dra-se ?*» (en ur diskouez ar c’helf, an delioù, ar brankoù da skouer)

2 – Diskrivañ un oberenn – 5-10mn

→ Lezel un nebeut segondennoù d’ar skolidi evit sellet ouzh an oberenn

→ Goulenn gant ar skolidi «*Daoust hag eñ ez eo ur foto, ur poltred ?*» «*Petra eo neuze ?*»

→ Goulenn gant ar skolidi «*petra a weler war an oberenn ?*»

«An diskar amzer eo», «Gwez a zo», «Ur ster a zo» «Un den a zo o pesketañ»

Ret e vo heñchañ respontoù ar skolidi tu vo sevel ar goulennoù da-heul :

«*peseurt koulz-amzer eo*», «*pelec’h eo bet kemeret ar skeudennoù*», «*Peseurt livioù zo war an oberenn ?*» «*Petra emañ an den oc’h ober ?*»

→ Goulenn gant ar skolidi «*perak ez eus skeudenn ur plac’h e-kichen an oberenn ?*» «*Piv eo ?*» «*Petra zo skrivet dindan ar skeudenn ?*»

Abadenn 4 – Sevel un oberenn – Gwener 25.11.2016 – Pazenn 1

1 – Diskouez ar pezh a vo graet, displegañ – 5mn

Penn-kentañ an devezh :

→ bodañ an holl skolidi hag a zo e touez ar re grenn evit diskouez dezho un oberenn hag a vo da ober.

→ Goulenn gante *penaos e vo graet an oberenn-se ? gant petra, petra hon eus ezhomm ? Peseurt livioù ?*

→ Displegañ dezho e vo graet traoù e pad meur a devezh, pal an devezh a vo ober ar c’hef hag ar geot, pep hini a c’hello mont war ar stal livaj pa en dezho c’hoant, met ret e vo da bep hini bezañ graet an dra-mañ a-raok fin an devezh.

→ Displegañ e vo ret dezho dont da gerc’hat ac’hanon p’ho do c’hoant ober.

2 – Kregiñ an oberenn – 15mn

→ Skrivañ anv ar bugel

→ Lakaat an davanjer

→ Lakaat livaj gell war an dorn, pegañ an dorn war ar follenn

→ Mont da gwalc’hiñ an daouarn

→ Kemer ar spouenn, lakat anezhi e-barzh al livaj gouer, pegañ war ar follenn evit ober ar geot

→ Gwalc’hiñ an daouarn

→ Tennañ an davanjer

→ Stagañ an oberenn ouzh al lerc’h ispisial rakjedet evit lakaat an oberennoù da sec’hiñ

Abadenn 3

Prientiñ :

Un daol

3 gador

Dafar :

fotoioù an diskar-amzer

taolenn V. Abbatucci

Tachenn labour ar programmoù :

2a – Ezteurel gant komzoù ent-kereadurel reizh ha resis.

3 – Pleustriñ doareoù disheñvel d’ober gant ar yezh dre gomz : kontañ, deskrivañ, dec’hervel, displegañ, goulennata, kinnig diskoulmoù, eskemm ur savboent.

27 – Deskrivañ ur skeudenn

43 – Lec’hiañ darvoudoù bevet an eil e keñver egile hag o lec’hiañ anezho : ur c’houlz-bloaz.

46 – Lec’hiañ objedoù en e geñver, etrezo, e-keñver objedoù merk

Abadenn 4

Prientiñ :

(penn kentañ an devezh)

Bodañ ar re grenn – Elipsenn

Ur foto eus ar pezh a vo kinniget

Dafar :

Livioù, follennoù, spouennoù

Tachenn labour ar programmoù :

2a – Ezteurel gant komzoù ent-kereadurel reizh ha resis.

20 – Dibab ostilhoù disheñvel, mediaoù, skorioù hervez ur raktres pe un urzh-labour. Implij anezho o azasaat e jestr.

21 – Tresañ evit skeudennaouiñ o chom feal ouzh ar werc’helezh pe ouzh ur patrom, pe en ur ijinañ.

23 – Kas da benn oberennoù plastek, e-unan

27 – Deskrivañ ur skeudenn

28 – Kinnig diskoulmoù d’ar raktresoù

1 – Diskouez ar pezh a zo bet graet hag ar pezh a chom d’ober

Penn-kentañ an devezh – 5mn

→ Goulenn gante *petra a chom d’ober ? Penaos ? Gant peseurt livioù ?*

Displegañ a vo ret ober delioù war an douar ivez peogwir e kouez an delioù

→ Displegañ e vo ret dezho dont da gerc’hat ac’hanon p’ho do c’hoant ober, dav e vo d’an holl tremen e-pad an devezh

2 – Kenderc’hel an oberenn – 15mn

→ Kemer an oberenn a glot gant ar skoliad a zo vont da kenderc’hel gant e oberenn

→ Lakaat an davanañjer

→ Lakaat ul liv war ur biz hag ober pikoù war ar follenn

→ Lakaat ul liv all ha kenderc’hel d’ober pikoù ...

→ Mont da gwalc’hiñ an daouarn

→ Tennañ an davanañjer

→ Stagañ an oberenn ouzh al lerc’h ispisial rakjedet evit lakaat an oberennoù da sec’hiñ

Pa vo sec’h an oberenn e vo tu stagañ anezho er c’hlas.

Abadenn 5

Prientiñ :

(penn kentañ an devez)

- Bodañ ar re grenn – Elipsenn
- Ar pezh zo bet graet VS ar pezh a zo d’ober

Dafar :

- Livioù, an oberennoù kroget

Tachenn labour ar programmoù :

- 2a – Ezteurel gant komzoù ent-kereadurel reizh ha resis.

20 – Dibab ostilhoù disheñvel, mediaoù, skorioù hervez ur raktres pe un urzh-labour. Implij anezho o azasaat e jestr.

21 – Tresañ evit skeudennaouiñ o chom feal ouzh ar werc’helezh pe ouzh ur patrom, pe en ur ijinañ.

23 – Kas da benn oberennoù plastek, e-unan

27 – Deskrivañ ur skeudenn

28 – Kinnig diskoulmoù d’ar raktresoù

Re vihan

Pal pennañ : Sevel un oberenn war an diskar-amzer

Palioù all : Deskiñ al livioù pennañ (Ruz, Melenn, glas), implij teknikoù evit sevel un oberenn

Abadenn 1 – al livioù pennañ – yaou 24.11.2016 – pep hini d’e dro

Kinnig d’ur skoliad skol-vamm dont da labourat ganin – 15mn

- Lakaat asambles ar memes livioù. Diskouez ar jestroù d’ar bugel hep komz.
- Lavar anvioù al livioù d’ar bugel
- Meskañ al livioù en-dro
- Goulenn gant ar bugel lakaat ar memes livioù asambles
- Lavar anvioù al livioù en-dro
- Goulenn gant ar bugel lavar war ma lerc’h

Abadenn 2 – al livioù pennañ – gwener 25.11.2016 – pep hini d’e dro

Kinnig d’ur skoliad skol-vamm dont da labourat ganin. – 5-10mn

- Lakaat asambles ar memes livioù. Diskouez ar jestroù d’ar bugel hep komz.
- Lavar anvioù al livioù d’ar bugel
- Meskañ al livioù en-dro
- Goulenn gant ar bugel lakaat ar memes livioù asambles
- Lavar anvioù al livioù en dro
- Goulenn gant ar bugel lavar war ma lerc’h
- Goulenn gant ar bugel lavar al livioù e unan en ur sevel ar goulenn «*Peseurt liv eo*»

Abadenn 1

Prientiñ :

- Un daol
- 2 gador

Dafar :

- Boest al livioù : tennañ an 3 liv pennañ (melen, ruz, glas) meskañ anezho war an daol

Tachenn labour ar programmoù :

- En arzoù : anavezout al livioù

Abadenn 2

Prientiñ :

- Un daol
- 2 gador

Dafar :

- Boest al livioù : tennañ an 3 liv pennañ (melen, ruz, glas) meskañ anezho war an daol

Tachenn labour ar programmoù :

- En arzoù : anavezout al livioù

Abadenn 3 – sevel un oberenn – Lun 28.11.2016 – pep hini d’e dro

Kinnig d’ur skoliad skol-vamm dont da labourat ganin e korn al livaj. – 15mn

- Skrivañ anv ar bugel
- Lakaat an davañjer
- Lakaat livaj gell war an dorn, pegañ an dorn war ar follenn
- Mont da gwalc’hiñ an daouarn
- Tennañ an davañjer
- Stagañ an oberenn ouzh al lerc’h ispisial rakjedet evit lakaat an oberennoù da sec’hiñ

Abadenn 4 – kenderc’hel an oberenn – Meurzh 29.11.2016 – pep hini d’e dro

Kinnig d’ur skoliad skol-vamm dont da labourat ganin e korn al livaj. – 15mn

- Kemer an oberenn a glot gant ar skoliad a zo vont da kenderc’hel gant e oberenn
- Lakaat an davañjer
- Diskouez penaos e vo graet an delioù en un doare «tampon»
- Lakaat ul liv all ha kenderc’hel d’ober pikoù ...
- Mont da gwalc’hiñ an daouarn
- Tennañ an davañjer
- Stagañ an oberenn ouzh al lerc’h ispisial rakjedet evit lakaat an oberennoù da sec’hiñ

Abadenn 3

Prientiñ :

- Korn al livaj

Dafar :

- follenn
- Livaj gell

Tachenn labour ar programmoù :

- 20 – Dibab ostilhoù disheñvel, mediaoù, skorioù hervez ur raktres pe un urzh-labour. Implij anezho o azasaat e jestr.
- 21 – Tresañ evit skeudennaouiñ o chom feal ouzh ar werc’helezh pe ouzh ur patrom, pe en ur ijinañ.
- 23 – Kas da benn oberennoù plastek, e-unan

Abadenn 4

Prientiñ :

- Korn al livaj

Dafar :

- follenn
- Livaj melen, orañjez ha ruz
- Tammoù kartoñs paper privezioù

Tachenn labour ar programmoù :

- 20 – Dibab ostilhoù disheñvel, mediaoù, skorioù hervez ur raktres pe un urzh-labour. Implij anezho o azasaat e jestr.
- 21 – Tresañ evit skeudennaouiñ o chom feal ouzh ar werc’helezh pe ouzh ur patrom, pe en ur ijinañ.
- 23 – Kas da benn oberennoù plastek, e-unan